

Les exploits missionnaires de Lommig KEREBEL ,
ancien vicaire de PLOUVIEN .

- I. Pell dâouez e barrez hag e vro Arvor
Lommig KEREBEL a zo êt war ar mor .
" Kenavo, bburk Plouvian, Kenavo Breiz-Izel ,
Gwerc'hez Trézien , diouallit ho pugel ! "
- II. Epad ma treuzed ar mor Kreiz-douarek
Penn Lommig oa tenval evel eun deiz koabrek,
N'eus nemet dour dirazan, warlerc'h, a ziou, a gleiz,
Dindan, an islounk hep mar a c'hed e breiz .
- III. O nann, gant Lommig n'eman ket brao ar stal.
E zremm drouk-livet, ar c'houezenn ouz e dal ,
Ar paour-kez a zo stouet e benn a-zioc'h ar speur
O c'heugi mantruz ma 'zeo eun druez-veur .
- IV. Perak, o Lommig, kuitaat solier ar zaoud ?
Sounn war da gillou, eno te oa eur maout .
" Rei eun tamm eus e c'hinou da vaga 'r peskig paour
-eme ar c'hranked - na pebez kaloun aour ! "
- V. Met setu-hont an douar adarre .
Raktal, o burzud, Lommig a zo pare .
Evel eun alar brabant, gant e staon, al lestr bras
A zigor eun hent a-dreuz ar c'houmou glaz .
- VI. O douar zantel ! Salud, bro Africa ,
Bro goz Augustin, hag e vamm Monika !
Warnout, goad ar gristenien en deus redet gwechall ;
Ni zigas d'it-te salud Breiz ha Bro-C'hall .

VII. Met aman ive, Satan 'zo war evez.
Evit touella en deus kant stumm nevez .
Merc'hed ar vro 'zo brudet evit o gened kaër;
Diouall, o Lommig, da galoun diouz al laër !

VIII. En Aber Tunis eal ma z'eo douaret,
Merc'hed an Islam a glev o lavaret :
"O burzud d'an daoulagad, o na koanta Roumi !"
Ha ne baouezent dirazan d'estlammi .

IX. Eur plac'hig yaouank, daoulagad du d'ezi ,
A lavar d'ezan : " Deut-ta ganen d'am zi.
Sidi, va zalc'ho 'zo Kaïd ; ha d'ho tigemeret
Kredit, Fatima a vezo henoret .

X. He zal oa ken glañ, hag he dremm oa ken koant
M'ha n'hellas Lommig mont eneb he c'hoant . tad
"Mil bennoz d'eoc'h, Fatima, ha mil bennoz d'ho t d
Ya ,ma a ielo ganeoc'h a galon-vat ! "

XI. E ti Mohamed, e oe grêt stad ouz Lomm ;
Tost d'ar plac'h yaouank, e galon a ieas tomm ;
Met ar zonz ouz e zever hen diouallas bepred ,
Ha brao e trec'has ardou an drouk-Spered .

XII. Ali mat Fatima a lakas en e benn ,
Gounit ar bôtrez d'ar c'hredennou kristen .
D'ezi e komz eus a Jezuz hag e groaz venniget
Hag eus ar Werc'hez Vari e Vamm garet .

XIII. Brao e tisplegas pardon ar pec'hejou ,
Ar Spered Santel o ren er c'halonou ,
Eun Doue karantezus, a ro d'e grouadur
Dre e Zakramant, e gorf evit mezer .

XIV. Siouaz, ar mare a deu da gimiada
An dour a red war jodou Fatima .
"Me zalc'ho sonj, emezi, eus ho komzou santel ,
Pedit evidon, Sidi Lomm Kérébel ! "

XV. Tri miz da c'houde, e Lourdes, eun Arabez
A oa daoulinet e-harz treid ar Werc'hez ,
Eur plac'h yaouank a c'hened, daoulagad du d'ezi,
He doa kemeret an hano a Vari .

XVI. Hirio Fatima, da Jezuz gounezet ,
He deus kemeret sae al leanezed
E Frans, e kouent Lisioux, pell diouz safar ar bee.
Bennoz da Lommig, ez eo eürus meurbet .

XVII. Da zeiz he gouestlou, Lommig a brezego.
En o mouchouer an dud oll a grogo
Evit sec'ha o daelou a red war bep jod,
Rag meur a galon en deiz-se a vo blod .

XVIII. Meulomp, mignoned, meulomp oll a-unan
Mennoziou Doue, Tad, Mab, ha Spered Glan ,
A laka da dalvezout zoken hon troiou kamm
Met kalon Lommig en deus bet tomm, eun tamm .

